



# CHANSON NEVE

Voar sujet ur Filouter fin en deus tromplet  
e Hostis : *Voar un ton neve.*

**M**E ho supli, oll tud yaouanc, da zont  
da glevet

Ur Son meurbet divertissant neve composer,  
A so gret da un den yaouanc, ur filouter fin,  
Mar ententes, ar farç plesant a rai deoc'h  
c'hoarzin.

Arabateo, compagnenez, ober dioutan :  
Bete re a filouterien so dre ar vro-màn ;  
Nemet hepquen avertissa an oll Hostisien  
Da ziouall na zuint da logea ar filouterien.

An den-mâ oa brao guisquet, un den a fæ-  
çon,  
Me fowch din e voa guinidic demeus a Leon :  
Squis e voa er guær ; re vaguet meur a hini so,  
M'en deus laquet en e speret mont da redec  
ar vro.

E Montrouilles hac e Guégamp, e Treguer  
eo bet,  
E Sant Malo hac e Dinam hac e Sant Briec,  
Partout oa o clasq e fortun, o poursu e chang,  
Arc'hant en devoa casset gantan ebars en-  
abondanç.

Baleet en deus bete Paris ar filouter fin ;

E yalc'h a so deut da blada fur en alafin :  
 Distroet eo bet d'an Naonet, ha bet e Roazon,  
 Alafin eo bet manquet e bourvifion.

Evel ma voa bet custumet da ober cher vat,  
 Evit ar veich e voa maguet cals re zilicat,  
 E quemeras effronteri da c'houlen logea  
 Ebars en un Hostaliri, n'oa diner gantâ.

Evel ma voa quer brao guisquet, en ty eo  
 antreet,

Bonfoir, emezàn, ma Hostis, ha me vo loget ?  
 Coania a fell din em pligeadur en ti-mâ fenos,  
 Hac ive eva ur banne ebars em repos.

Servicher, eme an Hostis, va mignon an-  
 treet,

Servichet viot a dra certen ar pez a guerfet,  
 Aset amàn en ur gador equichen an tan,  
 Quemeret ur banne da eva da gortos ho coan.

Servichet oa ma mignon eus a guement mad  
 A zesire tout e galon a draou delicat,  
 Guin Bourdel demeus ar guella hac ive guin  
 Spaign,

Ha liqueur an excellanta tout d'ar map ar  
 c'haign.

Pa en devoe debret hac evet, c'hoariet e  
 roll,

D'ar plac'h en deus lavaret : diservichet an dol,  
 Tennet o plajou, boutaillou, ivez o cueren,  
 Ma c'hasset d'am c'hampr da gousquet d'ur  
 guele quempen.

Amàn e comanças nec'hi bremâ an den  
yaouanc,

Penos e paeje e Hostis, n'en doa quet arc'hant :  
Evet emeus guin, emezàn, ha gret emeus  
cker,

Petra rin-me evit paea, n'emeus quet un diner.

Epåd an nos en e vele e oa chagriner,  
O songeal en e baemant n'alle quet coufquet :  
N'allin quet mont eus an ti-màn certen e nep  
guis,

Ma ne allàn caout moyen da baea an Hostis.

Guelet bremàn ar finessa eus ar filouter fin :  
Un diou pø deir heur quent an de e yeas er  
jardin ;

Buan ezeo bet comancet da doulla an douar ;  
E vragou en deveus plantet en toul-se raetal.

Pa en devoa enterret e vragou, e yeas en  
e vele,

Neufe en em laquas da goufquet da gortos aa  
de ;

Gout a re mat ar filouter e teuje a ben

Da ober d'an Hostis paea an escot pen-da-ben.

Anternos vintin pa savas evit partial,

Pa na gave quet e vragou, e comanças crial :

Fors, ma migonet, emezàn ; sicour, me ho  
ped,

Ha ma arc'hant ha ma bragou a so tout laëret.

An Hostis hac an Hostifos d'an ec'h a so  
pignet :

Chomet e repos, den yaouanc, petra so  
c'hoarveet ?

Hac e ve collet ho pragou, an dra-se ne netra,  
Arabat eo hon dicria, ny a ya d'e baea.

N'en deo quet hepquen ar bragou am gra  
chagrinet,

Ma oll arc'hant a voa ennàn : me a so ruinet,  
Beza voa en arc'hant hac en aour melen

Evit ato tri-uguent pistol ha daou scoet oc'h-  
pen.

Fouillet voa bet dre an ty ar servicherien,  
Mevel, mates, potr marchossi, bugale oc'h-  
pen :

Eon a voa fur oc'h e affer, a grie bepret :  
Penaus e zin-me d'am c'harter, tout e zon  
laëret.

Ententet, emezàn, Hostis, ebars e ber  
langach,

Ma na rentet dime ma bragou, me rei deoc'h  
domach ;

Evidon me gavo testou, pa vanque cant din,  
Penaus ne oan quet divragou pa zuis en o ty.

Evidon-me so den honest, mar deus er  
c'hontre,

Ne fell quet din ho ruina, pell dioc'h que-  
mense,

Rentet din ur bragou mezer ha tregont pistol,  
Me bardono deoc'h an anter, ne gollin quet

oll.

An Hostis hac an Hostises eus a galon var  
 A gont dezàn tregont pistol tout en ur yal-  
 c'har,

Hac ive ur bragou neve eus a vezer Saos ;  
 Eon a forti joaus neuse pa voa mat e gaos.

Rei a reujont da zijuni dezàn quent partial ;  
 P'en doa pardonet an anter, o doa joa ountâ ;  
 Pront hep sellet en dro dezàn ezeo partiet :

Quenavo, Hostis, emezàn, ar c'henta guelet.  
 Abarz nemeur goude an Hostis o terri ar  
 jardin,

En deus cavet en douar bragou ar potr fin :  
 Eon o comanç da grial eus a boues e ben,  
 Houmâ so tro ur filouter, ha me so un azen.

Quement Hostis so er vro-màn a ranque  
 donet

D'ober goab ac'hanon ; bremâ me so brao  
 tiet,

Collet emeus tregont pistol, ur bragou mezer  
 Ha c'hoas emeus roet da goania ha dijuni  
 d'am laër.

Bremàn e teuàn da avertissa an oll Hosti-  
 sien

Ma tiouallint dre quememâ ous ar filouterien :  
 Arabat eo da zen en em facha evit e glevet,  
 Dime ma-unan ar goassa, me so goall diet.

*F I N.*



CHANSON neve voar sujet un Ozac'h a so  
bet fouetet gant e Vrœc: var an ton, Bre-  
tonet, *d'en em zivertissa.*

C'Hoant em be d'o lacat da c'hoarfin,  
Pa gleffot petra so c'hoarveet  
Gant un Ozac'h demeus ar vro-màn, daïc  
tala,

Gant un Ozac'h demeus ar vro-màn  
A so bet fouetet gant e Vrœc.

An den-mâ a ranque lusquellat,  
Ha mont ivez bemdez d'ar ster,  
Ha ma na blige quet an dillat, daïc tala;  
En divige bazadou leis e lêr.

Que pront da lusquellat ar buguel,  
Squis e ma fen oc'h e glevet,  
Pe mar quemeràn ur gueuneuden, daïc tala,  
Ma mignon, me raï dit monet.

Ma Friet, arabat e fachac'h,  
Monet a ràn da lusquellat:  
Cousquet ase, ma Mabic bian, daïc tala,  
Mar fach ho Mam, n'emon quet mat.

Ian, ret e deoc'h sevel ar buguel,  
E doma hac e vailluri,  
Osa ar yot, quempen an ti-màn, daïc tala,  
Guelc'hi podou ba scudilly.

Me a ya da dy ma amezeguez  
Da gauseal un nebeut c'hoas,

Preparit lein aben ma ruin , daïc tala ;  
Peautramant o po fest ar vas.

Quemeret ho plijadur , ma Fried ,  
Me yalo d'oc'h avertiïssa ,  
Caout a reot pep tra preparet , daïc tala ;  
Aben ma teufot prest da leina.

Ma Fried , pa vo ho commodite ,  
Prest e lein , trempet ar souben ,  
Me ya ma-unan d'o servicha , daïc tala ,  
Da laquat guin en ho queren.

Ian , queit ha ma vin e leina ,  
Laquet buan dour var an tan  
Da velc'hi plajou ha scudilly , daïc tala ,  
Ha podes ma mabic bian.

Ian , amâ ezeus chomet souben ,  
Debret hervez hoc'h appetit ,  
Hac esquern a so mat da grignat , daïc tala ;  
Mæs ne douchet quet oc'h ar c'hiq.

Ma Fried , me a esse ur banne ,  
Ur sec'het bras ameus bremâ :  
Quemer da veren eta , mevier , daïc tala ;  
Te ac'heus c'hoant tout eus a peb tra.

Mont a ra da rinça e veren ,  
Ur maleür gantàn so c'hoarvezet ,  
Gant ar pres en devoa d'e velc'hi , daïc tala ;  
Entre e zaouarn e torret.

Chom a eureu a-gren estonet ,  
Ma lavaras en ur grena ,  
Ur maleür so gueneën arruet , daïc tala ;

Torret e ma gueren, emezâ.

Jarnicoton, eme Jaqueta,

Bremâ ny a zango ar bal:

Tennet ho praguezen, va mignon, daïc tala,

M'o po an diicplin ractal.

Taflica flaca a peb costez,

Me ho tesco da derri guer,

Na netra demeus an tieguez, daïc tala,

C'hui oar orfat an traou so quer.

Ma Fried, ho pet ouzin truez,

C'hui lacai ar goad na redeç,

Me effe quent guin gant ma botes, daïc tala,

Evit terri gueren ebet.

Guisquet he praguezen, ma mignon,

Ha deut da vouchat d'ar scourge,

Divoallet na dorfac'h davantaich, daïc tala,

Netra ebet en ho pue.

Quenta tra a dorri en ti-màn,

Me a grogo oc'h bleo da ben,

Ha memes tra oc'h da dioufscouarn, daïc

tala,

Quen na zuint queit ha re un azen.

Diouzin-me'ta, goazet yaouanc,

Tachet da bligeout d'o Croague,

Divoallet na viot re vechant, daïc tala;

Pe e viot fouetet couls ha me.

*E I N.*